


EVIT AN HOLL FRIOÙ-KURIUS SOT
GANT AN NATUR : TRAOÙ D'OVER HA C'HOARIOÙ
EVIT DESKIÑ GANT PLIJADUR

UR GOAÑVEZH
E-TAL AR POUILL



 **FLAK**

AR FLAK-MAÑ ZO DA :

PENNAD-STUR

O tostaat emañ ar vakañsoù... Flak ivez ! Er gazetenn-mañ vo graet anaoudegezh gant ar goañvezh e-tal ar poull.

Ar goañv ! Ar mare m'eo moredet pep tra, p'eo kouezhet an delioù diwar ar gwez, p'eo aet loened zo da c'hoañviñ, e-keit m'eo aet lod all d'ar broioù tomm. Sellomp a-dost pezh a c'hoarvez e-tal ar poull, neuze.

Lak da heuzoù, ha deus da sellet a-dost ar poull tostañ eus ar gêr. Ha war an dro e c'helli ober ar c'hoarioù a ginnigomp dit en niverenn-mañ. Ha na zisoñjez ket ar c'hwiz nag al levrioù erbedet dit e dibenn an niverenn-mañ kennebeut !

Skipailh Flak

TAOLENN

STOK-HA-STOK
Pajenn 3

PAZENN HA PAZENN
Pajenn 9

GOULENNOÙ LIZIG
Pajenn 1

AN ISTOR
Pajenn 4-5

C'HOARIOÙ
Pajenn 10

KWIZ
Pajenn 1

DA LIVAÑ
Pajenn 6

REKIPE
Pajenn 1

DISOC'HOÙ
Pajenn 1

AN TUTORIAL
Pajenn 7


EN NATUR
Pajenn 1

DIT DA GLASK
Pajenn 8

DU-MAÑ
Pajenn 1

Savet gant :

Gant sikour :



PREST DA LIAMMAÑ ?

Pa erru ar goañv e rank boudoù bev ar poull mont da glask repu ha bevañ war o fouezig, en ur c'hortoz ma teuio an amzer domm en-dro. Met ne gavont ket holl repu er memes lec'h. Ha gellet a rafes liammañ pep spesad gant al lec'h dibabet ganto da dremen ar goañv ?

Gweronell
an Alpoù



Sourd
boutin



Larvenn
Sourd



Larvenn
Dimezell



Larvenn
Nadoz-aer



Touseg



E donder ar poull ez an
evit chom kuzhet el
lec'hid pe war an douar



Er c'hoad ez an da
gavout ur guzhiadell evit
chom da c'hoañviñ
didrabas

HA GOUZOUT A REZ ?

Yen eo gwad an divelfenneged, ha kizidik int ouzh ar rev, evit-se ez eont dindan zour hag e sankont el lec'hid evit chom don er pri, hag en em wareziñ diouzh ar yenijenn. Mod-all ez kuitaont ar poull evit mont war-zu ar c'hoad, hag e chomont kuzhet dindan ur bern delioù marv hag e chomont morzet, setu pezh a reer goañviñ.

DANVEZ ENKLASKERiEN

Div sizhunvezh zo emañ gant vakañsoù Nedeleg ! Kenkoulez e kavan vakañsoù Nedeleg ha vakañsoù an hañv. E-pad ar vakañsoù diwezhañ, re an Hollsent, a blij din kement rak d'ar marese e vezañ erru skuizh, hon oa toullet ur poull-dour el liorz.

Ha fentus pezh zo c'hoarvezet dec'h : erruet e-touez ar plant ur voull vras ment ur vell petank. P'en deus gwelet se en deus lâret Anton : *"Ur voull kaot blev moarvat, gou't 'rez, pezh a ro neuz gleb d'az plev"*.

Raktal em eus tapet ur vazh ha stoket ouzh ar voull : gwir e oa, ur voull kaot blev e oa ! Met penaos 'ta ez eo aet er-maez eus ar pod evit dont betek amañ ? Nebeut goude ez eo erru Elouan : *"Ha da betra dalv ar pikoù du aze ?"*

Rak evitañ, douetañs ebet :

-*Poulloù lagadoù un euzhvil !*

- *Ha sell 'ta, degadoù anezho !*

- *Ya, kement lagad a vez kavet war euzhviled ar seurt-se !*

Iskis eo memestra, gwir eo. Ur voull savet diwar boulloù bihan e-leizh, hag ur voull vras du en o c'hreiz, heñvel a-walc'h diouzh mab al lagad, an toull du a gaver en hon lagad deomp ivez, met petra a ra kement a lagadoù amañ ?

Ha me da dapout ur vazh-roued evit tapout anezhi, en ur chom war ziwall ne vefen taget memestra ! Me hag a bak aon dirak ma skeud peurvuiañ, met evit ur wech n'em boa tamm aon ebet, ha lorc'h ennon zoken !



Erru Mari ganeomp d'he zro, ha tarzhet da c'hoarzhin :
"Euzhvil ? Un euzhvil eo d'ho soñj ? Met tamm ebet ! Ha ne gav ket din e vefe savet kaot-blev evel-se kennebeut... Ha penaos e vefe erru betek amañ ? Ur c'hoariell eo kentoc'h, d'am soñj, bet kollet gant Paotr Kozh an Nedeleg da geñver e droiad da gas ar c'hoarioù. Ne vefe ket ar wech kentañ... Ha ur vell evel-se 'noa bet ma c'hi c'hoazh ! Ha piv 'oar ma n'eus ket souezhadennoù da gaout diwar ar pikoù bihan du ? Ur vell-souezh eo, na petra 'ta !"

Ha setu pa oamp o tennañ anezhi diouzh an dour, setu Elouan o tapout ul lamm diwar e vazh, savet ar vazh en un taol, erruet war fri Mari zo kouezhet war Anton en deus fourret e viz em lagad, hag an holl da gouezhañ en dour !



E-keit ma oamp o sec'hiñ e-tal an tan hon eus graet klaoustre, hag ur prof a vefe roet d'an hini a oa ar wirionez ganti pe gantañ. Da bep hini da lakaat bec'h evit kas an enklaskoù war-raok...

Dav eo da Anton ober un taol-arnod bremañ : ret eo dezhañ lakaat podad kaot e vreur en dour, da welet ma teu war-wel pikoù du ivez. Ret eo da Elouan klask en e levrioù da betra e tenn babig euzhvil al Loc'h Ness. Dav eo da Vari mont da furchal e paner he c'hi da welet ma kavo e volotenn gozh. Diouzh ma zu e rankan tapout poltriji ar vell bemdez, kement ha gwelet penaos e troio an traoù.

Kevrinus eo ar jeu, memestra... Moarvat emamp war hent un diskoachadenn veur !

Anouck evit Dour ha Stêrioù Breizh

PETRA ZO BET KAVET GANT AR VUGALE ?

Kerzh da welet war bajenn, sell mat er pennad "dit da glask" ha divin 'ta pezh zo bet kavet gant ar vugale... Ken buan all 'po kavet araozo !

UR GOAÑVEZH E-TAL AR POUILL

Gwelloc'h eo d'ar sourd ha d'ar vuenn zour tremen ar goañv kuzhet mat etre ar gwrizioù, dindan ar man. E-keit-se emañ ar gleskered rous o tistreiñ davet ar poullou-dour evit dozviñ o vioù, desachet ma 'z int gant an amzer klouar.



HA GOUZOUT A REZ ?

Ar goañv eo, ha morzet eo an natur. Er mare-mañ eo koulskoude, etre dibenn miz Kerzu ha dibenn miz Genver, eo a vez dibabet gant ar gleskered rous evit mont war-zu ar poullou deuet diwar glaveier ha kresk an dourioù er goañv.

Ur mare mat evit selaou kanadeg an divelfenneged, un abadenn par d'ur redadeg motoioù. Kerzh d'ar prad da serr-noz gant da dud. Biskoazh n'eo bet klevet seurt abadenn kinniget gant ar gleskered !

Ha ma fell dit e c'helli kontañ deomp peus peus bet tro da welet ha da glevet.

AN TUTORIAL

UN DAOLENN LAND ART KLERET

Yen eo ! Rev gwenn a weler war ar geot... Ha gwell a-se ! Hiriv e savimp un daolenn land art kleret.

Ezhomm peus da gaout :

- goloioù podoù gwer,
- ur bannig dour,
- traoù bet kavet ganit en natur : delioù, bizhier koad...



1) Lak an traoù peus dastumet er goloioù podoù, evel ma kerez.



2) Lak dour ouzhpenn betek bord ar goloioù. Diwall ! Dav eo skuilhañ an dour goustadik, kuit da lakaat pep tra da fiñval betek re.



3) Lak ar goloioù prientet ganit war varlenn da brenestr, ha laosk anezho an noz-pad...

Setu ! Skornet int bremañ ha savet peus taolennoù land art skornet. Laosk anezho er-maez evit ma padfent pelloc'h.



Klask chom hep dastum ili, irin pe hugennoù, rak lod n'int ket mat da zebriñ, hag ezhomm o deus meur a seurt labous eus ar frouezhigoù-se evit tremen ar goañv !




DiT DA GLASK

HA CHOMET EO AR VUHEZ A-SAV ?

Ma seblant dit ez eo chomet ar vuhez a-sav, e gwir n'eo ket tamm ebet. Kavout a ri en dresadenn loenedigoù kuzhet er poull e-doug ar goañv. C'hwiled-dour, ditiked, notonekted, kemenerien-dour, larvennoù ditiked, gammared, c'hwiled-silioù pe c'hoazh limneed. Daou-ha-daou e ya an holl loenedigoù-se, war-bouez unan. Ha kavout a ri pe hini ?



Goañviñ a ra ar raned glas, sanket don e lec'hid ar poull.



Meur a vloaz e chom larvenned an nadozioù-aer da c'hortoz el lec'hid a-raok ma errufe o zreuzfurmatur.

Dozvadenn ar glesker rous a ra un tolz e stumm ur voull a zigor hag a zeu war-c'horre an dour.



Sanket don e traoñ lec'hid ar poull, an elestr a vez o c'hoañviñ ivez, pa ne chom nemet ar rizom outo.




Dont a ra ar gerc'heiz louet da laerezh un nebeut gleskered ivez.


PAZENN-HA-PAZENN

TRESAÑ AR GERC'HEIZ LOUET


Hirc'hareged bras eo ar gerc'heized louet, laboused a blij kalz dezho ar poullou-dour. Ha perak 'ta ? Abalamour ma teuont eno da bakañ raned ha gleskered a vez tapet ganto a-drugarez d'o c'houzoug hir stummet evel ul lavnenn.




Tap ur c'hreion koad ha tres daou stumm evel-se (ur batatezenn hag ur vesklenn vras).




Tres ul liamm etrezo e stumm un « S » evit ober gouzoug ar gerc'heiz.



Tres ar pigos ag ar paviou ouzhpenn, evel m'eo graet aze.



Bremañ e c'hellez diverkañ al lodennoù diezhomm, hag ouzhpennañ ar munudoù evel ar pigos, al lagad, ar pluñv.



Tresañ c'hoazh ar c'hupennoù (ar pluñv war he fenn) hag ar pikoù du war he c'houzoug hag he c'hrubuilh.



Bremañ e c'hellez livañ ar gerc'heiz evel-se, ha tres an adskedoù en dour. Prest eo da gerc'heiz da bakañ ur ran pe da nijal kuit !

HA GOUZOUT A REZ ?

En tu all d' 1m 60 e ra ar gerc'heiz louet pa astenn e zivaskell ! Dit-te bremañ da jediñ pet santimetr brasoc'h egedout eo ar gerc'heiz louet ?

AR C'HOARIOÙ

SKRAB-POULL

Lak al lizherennoù-mañ e urzh en-dro evit adkavout anv ar plant-mañ a gresk er poulloù-dour.



□ □ □ □ □ □ □ □ □



GERIOÙ-KUZH

I	C	R	Q	L	V	I	K	C	G	G	C	V	X
D	N	U	R	A	E	Z	U	P	Z	F	L	H	K
R	Z	Z	P	O	K	V	X	E	X	I	U	X	U
L	A	R	V	E	N	N	N	R	A	R	V	G	U
S	R	D	G	K	Q	K	E	R	C	H	O	M	R
T	K	E	R	C	H	E	I	Z	L	O	U	E	T
D	I	T	I	K	G	O	A	Ñ	V	E	W	Y	T
Z	I	K	J	S	W	X	P	L	E	C	H	I	D
R	U	S	R	I	B	L	U	V	T	V	M	T	G
A	H	G	B	V	N	C	J	U	D	U	T	G	D
A	R	Y	Z	P	O	U	L	L	X	Z	G	K	U
A	L	L	F	M	G	Q	A	B	S	Q	X	Z	J
W	D	S	K	O	R	N	W	H	P	K	W	B	G
C	E	E	V	S	O	N	S	Q	F	J	S	A	B

Setu ar gerioù kuzhet :

GOAÑV
DITIK
LARVENN
LEC'HID
ERC'H
POULL
SKORN
KERC'HEIZ LOUET
RIBL



HA GOUZOUT A REZ ?

10

Pa vez al loened o c'hoañviñ, ne chom oberiant enno nemet al lodennoù eus o empenn a ra war-dro chom bev. E-keit-se e chom morzet al loen a vez o c'hoañviñ. Met reaktant e chom e empenn, ha gouest eo dihuniñ ma 'z eo ret.

AR REKİPE

AN AGROAZ

Er goañv eo aes a-walc'h kavout agroaz, frouezh ar roz-ki pe roz gouez. Ur wech m'eo kouezhet o delioù gant ar gwez, p'emañ ar plant o c'hortoz an nevezamzer evit gellet bleuniaoua en-dro, aze eo aes gwelet eus a-bell o frouezh ruz-flamm. Adalek miz Here e c'heller dastum an agroaz, met gwelloc'h eo gortoz e vefe tremenet warno ar rev gwenn, da neuze e teu blot o bouedenn. Gellet a ri tennañ an doare golo du diwarno, a reer «ar kuchenn» diouti, ha flastrañ ar frouezhenn etre da vizied, a-raok sunañ ar voudenn, dous ha c'hwerv war an dro. Pa n'eo ket poazh e kaver enno etre 10 ha 25 gwech muioc'h a vitamin C eget en agrum (frouezh evel sitroñs pe orañjez). Brousgwez dreinek a c'hell tizhout 4 metrad a uhelder eo an agroaz, diwall neuze a vefes gloazet gant an drein pa vi o tastum ar frouezh. Ha laosk bepred lod outo evit al loened all !

KAOTIGELL AGROAZ

750 gramm agroaz azv-mat
1/2 sitroñs bet gwasket
100ml dour

- Gwalc'hiñ mat frouezh an agroaz, tennañ ar beg du, anvet kuchenn, diwar pep hini, ha pouezañ anezho.
- Lakaat anezho en ur gastolorenn, goloñ gant dour ha lakaat da boazhañ un ugent munut bennak.
- Goude-se e vo silet meur a wech evit tennañ had ha blev, dre m'int teuc'h, pe stomogus. Diwallit, skrabañ a ra ar blev, alese al lesanv «Skrab», roet da frouezh ar roz-ki.
- P'eo prest ar yod da dreiñ da gaotigell, ouzhpennit sukr ha chug sitroñs, ha laoskit war an tan e-pad un 20 mn bennak, en ur veskañ gant ul loa goad bepred.
- Prest eo ar gaotigell bremañ, lakait anezhi e podoù bet skaotet. Plijadur 'po lipat ho mourrou !



Kuchenn zu

Draenenn e stumm un dant-lagad ur c'hi

HA GOUZOUT A REZ ?

A-wechoù e weler bouloù blevek war ar bod roz-gouez, avaloù-gall a vez graet outo, a, zeu diwar un amprevan bihan eus kerentiad ar gwesped, rogn ar roz, a gustum dozviñ ur vi er plant. Evit en em zifenn ouzh an alouber e sav ar roz-gouez an aval-gall-se, en doare yoc'henn a dalvezo da bod ha boued d'ar vi ha d'al larvenn da zont. Hervez e vefe blaz kraoñ-kelvez gant al larvenn-se...

PETRA C'HOARVEZ EN NATUR ER MARE-MAÑ ?



An adaozañ er poull

Milieroù a zeliou marv a kouezh diouzh ar gwez er mare-mañ-bloaz. Meur a hini a echu o hent e traoñ ar poull. Petra a zeuint da vezañ ? Da gentañ e talvezint da guzhiadell evit meur a loenig, goude-se e tolmont hag e puzuilhont tamm-ha-tamm. Bakteri, foue pe boued-touseg hag organegoù mikroskopek all a raio al labour-se, ha goude-se e vo hini loened brasoc'h, evel al laou-dar, pe gwrac'hed, krestenedeg ar poullou-dour.



Kioc'h, gavig an hañv

A-wechoù pa dostaez diouzh ur poull e welez ul labous o nijal kuit a-daol-trumm en ur sourral. Tec'hout a ra buan neuze, en ur nijal kamm-digamm en oabl. Ur gioc'h eo al labous-se, aet kuit re vuan evit ma vefe bet amzer ganit gwelet anezhi. Kaer-tre eo he fluñv a dalvez ivez da chom kuzhet e-touez ar strouezh. E-doug ar goañv e vez alies er poull, ha gant he figos hir e klask he freizhoù, preñved pe blotviled, en dourioù bas pe el lec'hid. Klask neuze tostaat didrouz ar wech a zeu !



Viaoua !

Ar goañv kriz eo, met dont a ra ar gleskered rous da zozviñ er poullou bas a gaver er pradoù hag er c'hoadoù. Diouzh an noz e teuont, e-pad un nebeut devezhioù pa vez gleb ha klouar an amzer. M'emaout o chom e Breizh-Izel, e vefe adalek an 20 a viz Kerzu, padal e krog kentoc'h e miz Genver e Breizh-Uhel. Moarvat e c'helli gwelet an dozvadurioù-se war-c'horre dour ar poullou, met diwall neuze ! Difennet eo tapout ar vioù-se, abalamour m'eo gwarezet ar spesad.



Silzig o tigeriñ

Moarvat 'peus bet tro da welet an doare silzig liv rous-du iskis-se, evel lakaet ouzh ar ber war c'harennoù hir. Frouezh ar pennduennoù, korz pennoù du hir a gaver alies war vord ar poullou. Hag er mare-mañ-bloaz e tirog o frouezh dous evel voulouz, evit laosker da vont o had. E pep frouezhenn ez eus betek 30 000 hadenn a yelo gant an avel, evel ma ra hag ar c'hwervizon.

GOULENNOÙ LIZIG

AN DEIZ ALL E OA BET LÂRET DIN GANT MANAIG HE DOA GWELET UN AKSOLOTLED EN HE POUILL-DOUR. HA POSUPL EO ?



Deiz mat dit Lizig. Blotviled eo an Aksotletled, a kavet e vezont e lennoù an uhelderioù bras e Bro-Mec'hiko, pell mat diouzhomp neuze. Dibar int dre ma chomont larvennoù o buhez-pad. Hir eo o lost, ha gwelet a reer brenkoù a pep tu d'o fenn, evel ma weler war larvennoù ar sourded (luc'hskeudenn) ha re ar gweronelled. Moarvat eo unan eus al larvennoù-se zo bet gwelet gant da vignonez Manaig. M'eo anavezet an Aksotletled dre amañ ez eo abalamour ma vezont gwerzhet er stalioù-loened. Met ne tlefe ket al loened bamus-mañ kavout o flas en ul lestr-pesked, dre m'eo en arvar ar spesad...

GWELET 'MEUS HOLL LIVIOÙ AR GANEVEDENN WAR C'HORRE AR POUILL-DOUR. KAER E OA MET DONT A RA EUS AR SAOTRADUR, NEKETA ?

Alies-mat e weler ar saotradennoù-se war ar vord pe er poullou-dour. Tennañ reont kalz diouzh esañs pe tireoul, met peurliesañ n'eo nemet ur tropad a viliardoù a vakteri (boudoù bev kentañ ar blanedenn !) hag a ra ur gwiskad liesliv war-c'horre. Pa dremen ar gouloù dre ar gwiskad-se e taol livioù glas, gwer, melen hag orañjez... Un anadenn naturel-tre ez eo. Setu pezh a c'helli ober evit gwiriañ pezh eo : toull ar gwiskad gant ur vazh koad. Ma torr ar gwiskad e mil tamm ez eo bakteri, mod-all ez eo esañs...



E-DOUG AN HAÑV EM EUS KAVET LOENED DISEC'HET, NEUDENNOÙ GWENN O TONT ER-MAEZ EUS O C'HORF, HAG A OA WAR AR PLANT WAR VORD AR POUILL. PETRA ZO C'HOARVEZET GANTO 'TA ?



Pezh 'peus kavet ez eo muz larvenn un nadoz-aer. Goude bezañ tremenet meur a viz en dour e teu al larvenn er-maez eus an dour ha krapat a ra er glasvez. Chom a ra difiñv, ha treiñ a ra en un nadoz-aer a c'hell mont da nijal dindan un nebeut eurvezhioù. Chom a ra golo goull al larvenn, (pezh a reer here ivez) stag ouzh ar plant, evel ma chom ur chupenn stag ouzh ur c'hrog-dilhad. An neudennoù gwenn zo treuz-gouzougou a roe tro d'al larvennoù da analiñ dindan zour.

AR C'HWIZ

GWIR PE GAOU, AZE EMañ AN DALC'H



1) Pa vez al loened o c'hoañviñ e chom o empenn war evezh hag e c'hellont dihuniñ e-kreiz ar goañv.

GWIR PE GAOU



2) Peseurt plant a gresk er poull ?

- a. Ar pennduennoù
- b. Ar c'helenn
- c. Ar roz-kamm



3) Frouezh debrus ar roz gouez eo an agroaz.

GWIR pe GAOU



4) Peseurt larvennoù amprevaned a ya da guzhat e deun ar poullou er goañv ?

- a. Larvennoù ditik
- b. Larvennoù nadoz-aer
- c. Larvennoù buoc'hed-doue



5) En tu all d'1m60 e ra ar gerc'heiz louet pa astenn e zivaskell ?


GWIR PE GAOU

HA GOUZOUT A REZ ?

Niverus-tre eo an amprevaned e traoñ ar poull. Larvennoù a gaver, evel-just, met ivez amprevaned al evel an ditiked pe kemenerien-dour.

DISOC'HOÙ

DiT DA GLASK




SKRAB-POULL

P E N N D U E N N

GERIOU KUZH

I	C	R	Q	L	V	I	K	C	G	G	C	V	X
D	N	U	R	A	E	Z	U	P	Z	F	L	H	K
R	Z	Z	P	O	K	V	X	E	X	I	U	X	U
L	A	R	V	E	N	N	N	R	A	R	V	G	U
S	R	D	G	K	Q	K	E	R	C	H	O	M	R
T	K	E	R	C	H	E	I	Z	L	O	U	E	T
D	I	T	I	K	G	O	A	Ñ	V	E	W	Y	T
Z	I	K	J	S	W	X	P	L	E	C	H	I	D
R	U	S	R	I	B	L	U	V	T	V	M	T	G
A	H	G	B	V	N	C	J	U	D	U	T	G	D
A	R	Y	Z	P	O	U	L	L	X	Z	G	K	U
A	L	L	F	M	G	Q	A	B	S	Q	X	Z	J
W	D	S	K	O	R	N	W	H	P	K	W	B	G
C	E	E	V	S	O	N	S	Q	F	J	S	A	B

STOK-OUZH-STOK



AR C'HWIZ

- 1) Gaou
- 2) Pennduenn
- 3) Gwir
- 4) a & b
- 5) Gwir

PiV ZO A-DREÑV FLAK ?

Pennadoù ha c'hoarioù gant : Violaine Bichon, Anouck Bonjean, Julie Druon, Mélissa Chapelain, Michel Riou, David Guégan, Erell Mendil

Maketenn ha pajennozañ : Pauline Kerscaven

Troet e brezhoneg gant Sten Charbonneau, gant sikour stalioù Biocoop Aodoù-an-Arvor

Ma fell deoc'h lavaret ho soñj, skrivit deomp d'ar chomlec'h-mañ

pauline.kerscaven@eau-et-rivieres.org



biocoop

**DES COMMERCES
ENGAGÉS
POUR LA
PROTECTION
DE LA
BIODIVERSITÉ.**



Ce Flak est soutenu
par les magasins Biocoop
des Côtes d'Armor

Tous nos services, nos
adresses et nos horaires sur
www.biocoop.fr